

AN DOUE ARC'HANT.

22B

Var an ton *Olifernez*.

Tostaît aman hac e cleffet
Pe seurt Doue eo a adoret,
A me lavaro deoc'h gant guirionne
Pehini eo o prassa Doue.

Na gomzin qet deoc'h a idolatriet
Evel a ador ar bayanet ;
Deuz Venus na deuz Cupidon
Ne gomzin qet enep feçon ;

Deuz Jupiter, na deuz Bacchus,
Na deuz or Redemptor Jesus,
Pehini a ve gueneoc'h dishenoret
Dre o fos doueou pa o adoret.

Mes hini deuz ar re a meuz hanvet
N'en deo o toue ar muya caret,
Pehini eta eo an doue brillant,
Ha me lavar deoc'h an doue arc'hant.

Oh ! ma n'esse an Autrou Doue
Qement a joa deus ma ene,
Me lavar dec'h ep laqat mar,
E zine renq huella deuz ar gloar.

Ya, an arc'hant zo muioc'h respetet
Evit n'en deo tri ferçon an Drindet ;
Muioc'h a garante ho peuz oute
A vit a nec'h o peuz deuz o ene.

Ya, bea a zo cals, ha ma teusse
An diaoul, contrat gantan a reffe ;
Me gret, evit caouet arc'hant,
E renoncefec'h cren do badiant.

.... arc'hant a fel din da gomarassi
Evel deuz eur vanden dridi,
E lec'h a ve cals aneze e chomant
Mes deuz lec'h a ve neubet e risquant.

Hag etre vezo daou zen var ar bet,
Ambition et vezo bepret,
O clasq gout pehini deuz aneze
En deffe ar brassa bern deuz oute,

An hini en devo ar bern brassa,
Hennez a grio c'hoaz ar muya,
En defot na vel e vern closet,
Hag eur bern nevez commanet.

Mes hervez ar vue temporel
D'an arc'hant eo ret beza fidel.
Rac er bed-mâ, n'en deuz netra
Nemet arc'hant o pe da baea.

Pa zan d'ar foar pe d'ar bardon,
Digoneout gant querent pe gant mignon,
Antren ebars e compagnunez
Eb arc'hant e cavan diez.

A mar be ebars eun assamble
Jeuyou, pe nep seurt curiosite,
N'em ziverissa, e allan a dra sur,
Mes ma arc'hant e zo en aventur.

Ar beorien qez gant o ezomou,
Ha ve ive e clasq o liardou ;
Mes d'ar re-ze e vo tallet
Tri lari de rain vit caouet eur guennec.

Pa zeui mab den var an douar,
Arc'hant e fot gantan ractal ;
Ober eur c'hristen deuz eun hugunot,
Da guenta tout arc'hant e fot.

Gant ar gomperrien emedi ar c'his
Da roi arc'hant d'an dud a ilis ;
Ar c'hleier en brall, gant an *Te Deum*,
Gonezet eo e zaou scoet gant ar person.

Arc'hant e fot ebars dimezi
Arc'hant e fot evit eureuji ;
Ben receo ar seizveit sacram ant
Ez eo necesser caouet arc'hant.

Nep a deuz arc'hant a yelo ez,
Memez ar guinvidri gomez ;
Arc'hant a zo da denna dispans
Ha da ober a nevez allians.

Ya, gant'an arc'hant e heller
Hac ober tra a disober ;
Mont er meaz e guerent diez,
Da chortos mont er briedelez.

Pa viot clan var o cueie,
En eur goel extremite,
Penaos cavet soulagamant
Mar doc'h privet deuz a arc'hant.

Asten a rer gantan ar vuez,
Hag e diver a rer ivez ;
Lod e sco var boul o c'halon,
O veza bet d'an arc'hant e vignon.

A deuztu pa viot maro,
Arc'hant querquent hag o seulio ;
A ben po canet ar *Per omnia*,
E renquer caouet arc'hant da baea.

Noc'h evit antret e carg ebed,
Na gant den beza respetet,
Ma na peuz arc'hant da brena speret.
Muioc'h evit en denz Doue d'och roet.

Ar sotta den, mar en deuz arc'hant,
E zo tremenet evit eun den savant ;
Den adret eo, ebars er c'honverchou,
Er guer couls hag er marc'hajou.

Ya, e arc'hant e zo bemde
O tont da zestum dezan danve ;
Mes qet evelse, evo lavaret,
Gantan ema tout a oll speret.

An orgouil, ar superbeite,
Gant ar pec'het a vanite,
A laqayo an dèn-se da bec'hi,
O cavet eur seurt melodi.

Ya, gant an arc'hant eo permetet,
Ep quet da goueza ebars er pec'het,
Prena ha guerza er boutiquou
D'ar sul qer couls ha d'ar goueliou.

Hag eur paour qeaz, mar be guelec
Eur sull o clasq eun tam qeunet,
E laro an autrou quen couls hag an itron :
Hennez zo eun den ep religion.

Ya, gant arc'hant ema commod
Dont d'ober eur biaijen vlod ;
Mes an hini zo privet aneze
A rayo puiigen galet bemde.

Memeuz ebars en ofiç,
C'hui a assisto ez ebars er sacrific :
Neb en deuz arc'hant da baea
Ne renqo qet chom en e za.

Eur gador dindan ho taoulin,
Plaç da bosa o tiou ilin ;
Pa ma vez a real en o za,
C'hui bezo cador da azeza.

Ya, gant arc'hant et permet an ilis
Tremen berber ar c'hoaris.
Ya, herve lezen ar bed,
A guir eo quement-se-ta a hui gret ?

Eller profani an daou ugent devèz
A reas Ili, or Salver a Moises,
O yun ebars en desert o zri,
Noz de ep efa na dibri.

A c'hui e fell dec'h gant o arc'hant,
Deuz a bec'het beza rentet exant ;
Sulvui e clasquet o plijadurzou,
Sulvui e pellec d'euz an enonyou.

Eur veich a rez reflexion
O clevet eun dén deuz ar c'hanton ;
O coms din deuz pancion e gaz
E rent ac'hanon estonnet bras.

Ma c'haz a zo eun tamic latous,
Ne gaf get mad ar souben rouz :
Souben a lez, gant a amant rouzet,
E gaf guelloc'h evit souben ar pesquet.

Grampoez fritet, goayen a lez douç,
A lag friant er moutic rouz,
Ha ra dezan mont da logota
Qer contant ha qen joayus a tra.

Me reaz reflexion drist var guement-se.
Eun devez o clevet ma bugale,
On tri pe pevar mis goude Pasq,
O c'houfen ne get echu ar c'hoaris c'hoas.

Ar c'hoaris, ma bugale,
A bad deuz lod a zo bemde ;
A lod all, ne int qret evit ober
Sadorn, na c'hoaris, na guener.

Ya, m'en assur zo qi a cas
Hag a zo druoc'h o repas
Evit n'en deo hiui cals a dud entre,
A n'en deo get eun eston qement-se.

Eur paour ell antren en o ti,
C'hoant hag ezom déan da zibri,
A marteze gant o comzo
C'hui en contanto da vont en dro.

Goude-ze e antreo ar boure'his,
Eun dén gentil, pe eun dén a ilis,
Hag a reffet ho tienez
Evit rei frico da hennez.

Ya, caer en devo dibri.
E viot beporet deuz en pourchui :
Debret eta ep complimanchou,
Ya, mar qevet mad ar frico.

Gant an gêñ-se o veza meulet,
En pec'het Lucifer e coëffet.
Pa voa chasseet deuz an Envou
Ebars en fonç an abimou.

Me ho ped da ober reflexion
Var avis ar fur Salomon ;
Disonjet cren ebars en arc'hant,
Evit beza eürus eternellamant.

D'ho zestum c'hui a laqa cals a boan :
Ho recompañ a vezo bian ;
Marteze ar recompañ o pezo
A vo devi da james ebars ar flamo.

Penaos eta beza qen dallet ?
Penaos ta beza qen ton'ellet ?
Penaos bean d'an arc'hant qen mignon,
Mar main caus d'ho taonation ?

Ar fals pinvidic, ebars ar flamou,
O lesqi gand an diaoulou,
Carguet a gueuz hag a c'hlac'har
O veza refuset ar paour qeaz Lazar.

Judas a oa eun dên qer mechant,
A verzas eur Zalver evit caonet arc'hant ;
Mez p'en devoa anavezet e fot bras,
E oll arc'hant a restituas.

Ma ve an oll examinnet,
Ped Judas eta na vo qet cavet !
Ped dên eta a ra ho daonation
O veza d'an arc'hant vignon !

A c'hoas e zoc'h goassoc'h evintâ,
Nag e pe oll arc'hant ar bed-mâ,
Ne zeufac'h james d'ho restitui,
Nag e vec'h et en he hangoni.

D'an amzer ma voa ar Verç hez Vari
Var ar'poent da henel ar Messi,
D'euz a bartout e vize chasseet :
Arc'hant da bæa ne devoa qet.

Qement dor a so er parlamant
A zigorer tout gant an arc'hant,
Mes, allaz ! dor ar baradoz,
Evit arc'hant e chomo cloz.

Hor Zalver en devoa e digoret
Pa voa dre fot Adam serret.
Na, dre e varo a bassion sanglant,
Mes ne c'homzer qet d'euz a arc'hant.

Nan, biscoas dèn n'em euz clevet
Nag er Scritur n'em euz qet lennet
E ve bet arc'haot biscoas etre e zaouarn,
Mes treuzet gant an tachou houarn.

Allaz ! an hent da vont d'ar gloar
E zo ive dre venez Calvar ;
Red, eo cavet lod er poaniou
Abars jouissa deuz ar joayou.

Nep a ra an titr neve
A zo a viscoas er baourente,
Hag e qeit ma vo var ar bed,
Biqen nemet paour ne ve guelel.

Mes a pez en consol, pa sonj erfat,
O velet omp bugale d'ar memes tad,
E zomp oil breudeur ha c'hoarezet
Galvet d'ar memes eürustet.

Mes laret e rân gant assuranc,
N'hor beuz qet er bed-mâ ar memes chanç ;
Lod en deuz cals honeuriou,
Ha lod all n'o deuz nemet croaziou.

Dougomp e gant paciantet,
E bras nimp a vezo recompancet
Er barados en eur goulan tamant,
Vep dezi ebet da gaout arc'hant.





AN DISPUT

ETRE AN DEN DIMET HAG AR MARO

An Den dimet.

Tostaet cristenien abalamour da Zone,
Da glevet un disput composet a nevez,
Pehini a so grêt gant un den dimezet,
Pa voa deut ar maro da laza e briet.

Pa laquan ma speret, resolvet en entier,
Ae ar bluen em dorn da scriva var baper,
Dont hep em vanti, ober d'an dud crena,
Bet tener a galon o donet da voelan.

Ar Maro.

Me so sur ar maro pehini eo ar chria,
A laquo goad an oll da donet da iena,
Bet a meus ar pouar a bers a guir Otrou,
Da laquat ar bed oll eur veach sur d'ar maro.

Rac en em breparet groet a nepa garo,
Pa sonjont an nebeutan gante me harrio,
Boue er gommausant betec ar fin diveza.
E seo sur ma dever hag a rin aneza.

An Den dimet.

Me voa bars er bed-ma bras em plijadurez,
A ma friet a me a ma oll bugale,
Eu ur blijadur mar am boa biscoas,
Mar bevomp assambles nia a vezo c'hoas.

Beza am boa madou en anbondans,
Hac e voamp er bed-man en ur rejouisans,
Mar plijou gant Doue ma Zalver birisant,
Nem gavo c'hoas er bed beb sort contaminant.

Ar Maro.

Arbed-ma, eme ar Christ, a zo hanvet trefour.
Ur goaper un trompler memes hon adversour,
Rei e ra da gredi da re a fi ena,
Hac en no hagoni e c'helout c'hoas beva.

Rac-se ta, ma den quer, na fiet quet ena,
Pa zeo sur hon trompler laquet evez honta;
Car mar gret fondamant var ar bed tromplus,
Hep dale pel amzer c'hañ a vo morc'hedus.

An Den dimet.

Pa lenan ar scritur sacr cavan rapportet,
En ur leor midi dor Manuel hanvet,
Tri c'hant tri a tregont en deus ar feuilhenou
Ur maguer excellent da gomposi guerzou,

Mes petra a glevan ac a droubl ma speret,
Hac a lavar dime na fiet quet er bed,
Troublet eo ma ine a ma hontantamant,
Ha hep dale pel amzeram bezo chachamant.

Ar Maro.

Deis mad deoc'h daou briet hac en nem gar
Ordrenet a zo din gant Doue eternal, [fidel,
Donet do separi an eil deus eguile,
Car unan ac'hanoc'h o taou a golo e vùe.

A ne rinquet da choas deoc'h an eil nac eguile
Car ar greg a renquo dileze e bue,
Hopried, maden quer, a renkoc'h da dilesel,
Me ha da rei breman dezi e sol mortel.

An Den dimet.

Maro cri a digar! petra e ra dide,
Goude laza ma far, em lezel en bue;
A nin er memes goad gant Jesus uniset,
Ne houfenquet beva goude e divoeret.

Bevet hoamp asambles er memes union,
Ar memes bolante, ar memes affection,
Neb james caout disurs na neb sort fachiri,
Bremant creishon nerze och deut don troublit.

Ar Maro.

Cals demeus ar real a meus bet troublet,
Pa sonjent en neubenta, en n-rs. en iec'h et;
Car diävis an den en em les da ruillal.
E jouaiou er bed-ma pere so disleal.

Bep den a gle serten jonsal bars er maro,
Pa neo quet er bed ma evit biquen bro,
Ur requet a refen ma ve permetet din,
Voar mididou Jesus, me ho pet da asebti.

An Den dimet.

Mar teufen da vervel ma hent ganti er be,
Pe he lesti c'hoas ganen da huza ma bue,

Ar maro.

Doce a houl ouzit ar pez a us querant,
Ar pez a ra da jea, a garit. ar ouian,
Deut da souffri gant Job, tad dar basiantet,
Ac e guelit un de en envo curunet.

An Den dimet.

Guir eo Job a golas e ol vat en un de,
Goude ar maro cri eus e oll vugale;
Groa din ar memes tra, lest gane ma friet,
Me rei dech en antier quement meus tout er
[bed.

Ar Maro.

Doce ne c'houlen quet e varfec'h en un de.
An eil den a renqo lienna eguile,
Len pis ar scritur sacr, ac e cavi carguet,
Dimeus a exemplou voar er memes sujet.

Abraham a gare Isaac, e vap unic,
Dré amour paternel, herve ma lar ar scrit
Mes Doue a ordrenas dont de sacrifician,
Ar pez a voa sansib da un tad e vel dan.

An Den dimet.

Henes a so un exempl d'ar bed oll en antier,
A me so ur paour quès hac er pratiquilier,
Hac a esper penos en devo ma Doue,
Compasion onzin a heus ma bugale.

Non pas false quet din e ve ressusitet,
Evel an eil Isaac, rac ne veritan quet,
Mes mar béze bet c'hoas un dec vloas he bue
Nin bije gret hon daou fortun hor bugale.

Ar Maro.

Guelet sant Izidor a oa eur labourer,
Gonnit ar barados hennes eo en dever,
Rac fortuniou a zo meurbed tromplus,
Neb ra font varneze a vezo malurus.

Nep a glefe o coms a sonjfe efec'h pet,
Quen neceser er vro evel ar Cesaret.
Ar re se, daoust do nerz a do oll corpulans,
A teuas pa gommandis da dansel gant ma dans.

Neron, Tibirius, daou Empereur cruel,
Daoust do oll arrogans en deus renquet mer-
Antiochus, Cesar, Romulus a Pompe, [vel,
Eb galout resista e meus bet ho bue.

Alexandr ar Bras, Nabucodonosor,
A re o adore var an douar a var inor,
Unibrio glorijs, daust de oil corpulans,
Quer couls ac ar paour Job a sigasis d'am
[dans.

Samson, ar crean e voa biscoas er bed,
Salomon, ar fura e oâ gant mam ganet,

Evit nerz a furnez a pa droas em pen,
E laquis ho c'horfou dalc'het var an dachen:
Sant Iann, ar Bidezour daust de oll santeles,
A meus me debennet couls a Holofernez,
Da Jesus Christ memes ne meus quet par-
[donet.
Hac en Doue, a Den, a Redemptor er bed.

Dar Vere'hez gloriuz ha de ol martiret,
An nebestel guechal hac er gonfesoret,
Bref, ne deus hini ane, a guement a ouffe,
Ampech enep feçon em bezo e vue.

An Den dimet.

Pa heus da Zoue na d'ar Vere'hez pardonet,
Na meus quet affer da houlen ouzoc'h ma
Da volonte Doue eo en n'em rezinan, [fried;
Dives a quement mat e meus oll er bed-man.

Pardon eta, ma Jesus, mar beus abuset,
Dimes en no madelez eo beo meritet,
Effet ar sacramant a ma necesite,
A ra din resista quement do bolante.

Ar pes am laqua trist ac a droubl ma ene,
Eo ma renquan tremen etre daouarn Doue,
Ar Sænt sonjal a ze en deus anduret,
Rostet en tan ar chrill hac er caoter devet.

Ar lesen a so crea hon dispans oll breman,
Do souff ar marou den em sacrifician,
Mes groeomp on oll effort en or pasionou,
Hac he hamp gant ar Sænt curunet en envou

Setu aman er fin hanno ar c'hopier,
An Naour Nicolas, e'etat zo guiader,
A ra deomp eun avis quen evit finissan,
Da gaout sonj a Jesus queit a huim er bed-
[man.

(Propriété.)

NAOUR NICOLAS.

Lannion, imprimerie V^o Le Goffic, libraire.

